

## KENTSKRID

An tregont eizh notenn a ya d'ober korf LAVAR 16 zo frouezh ar youl o deus ur rouedad kevelerion da gaout en o c'herz ar binvioù lavarel dereat rekis evit o labour pemdeziek. Ar pal hollek-se a ro da gompren perak ne vez raktres ebet da levrennoù LAVAR. Gweet e vez an danvez anezho evel ma teu e teu hervez ar c'hrefen a yezh, met ivez a breder, a gav an aozerion a-dreuz d'o hent. E se, e toug al levrenn-mañ roudoù eus :

Oimbourc'hioù Gab Cherel hag Alan E. Ar Berr, a verk un termen da vloavezhiadoù prientidigezh o levr, *Geriadur ar Verdeadurezh*, deuet er-maez hevlene<sup>1</sup>,

Oematersoù Laorañs Motrot war an durc'hadurioù kempred boutin etre ur preder arab 'zo hag ur preder brezhon 'zo,

---

<sup>1</sup>Gab CHEREL & Alan E. AR BERR, *Geriadur ar Verdeadurezh* e div yezh: galleg, brezhoneg, Preder, 2004, 510p.

Oar strivoù renet gant Yann Varc'h Thorel evit lakaat en ur brezhoneg resis ha sklaer ur studienn sirius ha klok, savet avat en ur galleg diouzh ar c'hiz *psi* gant un arbennigour war strafuilhoù anaoudel ar vugale er skol,

Oembregadennoù Pierrette Kermoal en amboaz reiñ ul lañs nevez d'ar skridvarnerezh ha d'al lizheregouriezh,

Odamant Martial Ménard da bourchas d'ar skolioù dornlevrioù ha geriadurioù er yezh kempred,

Okendalc'h an ergerzhadennoù kaset gant Roger Le Nestour en istor riezoù ar bed abaoe an 18<sup>t</sup> kantved,

Oal linennoù bras treset gant Chantal ha Yann-Baol An Noalleg e sell d'ur Geriadur a'r Geginouriezh,

Otaolioù arnod Guy Étienne evit dedalvout d'ar c'hramadeg hentennoù 'zo eus ar Brederouriezh,

Oerbar an hevelep aozer da geñveriañ, e sigur ur sell war skridoù Husserl, Heidegger ha Descartes, barregezhioù an alamaneg, ar galleg hag ar brezhoneg e lavar ar preder.

En tu all da zehentadurioù pep hini eus ar genlabourerion emañ noz an dianav war o c'hammedoù da zont. Noz houmañ a ouzont bremañ ez eo lod en aoz mab den krouer. Mar bez nec'h da gaout evito, emañ e lec'h all, en aters-mañ: an angerzh o doug da dreiñ kein d'ar saviadoù gwerc'hel etrezek sevenadennoù nevez, daoust ha ken pell ez eont ha ma kinnig o

c'has? Dont a ra an dañjer eus an digenvez m'emaint, eus an erez a ziskouez ouzh o sevenadennoù an dud end-eeun a c'hortozent m'o c'hemerfent da vonveziad. Ha pa nad eont ket betek paouez a dreiñ kein, ez int temptet da arouarekaat war zigarez gortoz ur ``bobl'' a vije ouzh o heul. Hogen ur bobl grouer n'he deus ket a heulierion: plas a vez d'an holl war dalbenn ar c'hrouiñ. Eno, pep mestr zo diskibl d'e ziskibl ha pep diskibl zo mestr d'e vestr.

En hañv-mañ ez eus c'hoarvezet un avantur gelennus gant mererezh LAVAR. Hervez ar boaz e oa bet goulennet ur skoaziad digant ar C'huzul Ranndir-boaz nad eo ket hep dislavar, nad eo ket da gareziñ koulskoude, rak a-geit ma c'houlenner skoaziadoù evit LAVAR, n'eus ket bet kemmet ur pik e testennoù ar gelaouenn war-benn gounit an danvez skoaziaderion (pet en o zouez a du 'rall a ve gouest da zisklipañ ul linenn en kez testennoù?). Bezet pe vezet, e voe korbellet ar goulenn dre an abeg ``m'he doa ar Vodadenn Ranndir divizet paouez a skoazellañ ar c'helaouennoù gouiziek<sup>2</sup> ''. Abeg anatañ disentez ar guzulierion eo dibouezded dilennel aozerion ha lennerion ``kelaouennoù gouiziek'' ar Ranndir. Ul lusked all, hollekoc'h, da lakaat e penn kont emichañs eo an disfiz o devez piaouerion ar galloud ouzh neb a venn dezevout drezañ e unan. Dilesoc'h avat, ha yac'husoc'h, eo degemer an nac'hadenn evel

---

<sup>2</sup> ``L'Assemblée régionale a décidé [...] de ne plus aider à la publication de revues savantes'' (La Direction générale des Services du Conseil régional de Bretagne au Président des Éditions Preder, lizher eus ar 1<sup>er</sup> Gouere 2004).

merk an dislavar a vez er seurt goulennoù arc'hant-  
d'ar c'houlennerion d'he c'hlevout evel kuzulikadenn  
an daimon pintet war o skoaz : ``Mard oc'h krouerion,  
na c'hedit ket heulierion d'ho harpañ : ar grouerion  
eo a harp ar grouerion.''